

Kantik Sant Paol.

Refrain

Sant Paol, Patron benniget
 hor bro gaer a Leon,
 Ni 'fell d'eomp holl ha karet,
 kennerzit hor c'halon.
 En hon touez ho relegou
 'Zo hor brasa tenzor:
 evel gwechall hon tadou
 ni 'ro d'ezo enor.

1. Kristenien vat Bro Leon
 en enor d'an Dreinded
 ha da Sant Paol hor Paeron,
 hon tad meurbed karet,
 holl kanomp mil meuleudi
 karantez ha bennoz.
 Ra vo d'eomp-ni eun dudi
 e veuli deiz ha noz.

2. Sant Paol a Leon zo ganet
 war-dro ar bloaz pemp kant.
 Gant eur vamm gristen garet
 e teskas beza sant.
 Vreiz-Veur eo bro e gavell,
 Sant Ildud e vestr-skol;
 ha goude manac'h santel:
 setu yaouankiz Paol.

3. Eun nozvez a-greiz pedi
 en e beniti glas,
 e wel an Nenv o skedi,
 e chom sebezet bras:
 An nenvou o tigeri,
 o fiskenn eun ael gwenn:
 heman goude saludi
 a gomzas evelhenn.

4. "A-berz Doue, den santel,
 gourc'hemenn a ran d'it,
 dilezel bro da gavell:
 ret eo raktal mont kuit.
 E-kreiz noz-du ar pec'hed
 ez eus eneou keiz
 a c'houlenn en o sec'hed
 sklerijenn ar gwir feiz.

5. Breiz-Vihan a wel goude
 o tont eus a Vreiz-Veur
 kannaded a-berz Doue
 Sant Paol gant daouzek breur.
 En Eussa e touaront,
 e pedont leun a feiz,
 betek an eur ma welont
 o c'houlacui an deiz.

Salut du Saint SacrementAdoromp holl

1. Adoromp holl e sakramant an aoter
 Douz kuzet, Jezuz hor mestr, hor Zalver.
 Sperejñu evurus, elez ar baradoz,
 gant karantez a dan,
 meulit hen deiz ha noz,
 meulit hen deiz ha noz.

2. Gwir Vab Doue, en em c'hraet den d'hor pre
 en osti sakr oc'h kuzet 'vit hor maga. na,
 Plijet ganeoc'h skuilha'eus ho tron an aoter
 warnomp daoulinet aman
 ho pennoz, va Zalver,
 ho pennoz, va Zalver.

3. Enor ha gloar ha karantez da Zoue,
 d'an Tad, d'ar Mab, d'ar Spered Santel ive.
 Ra vezo e pep lec'h an holl grouadurien
 aketus d'e veuli, hirio ha da viken,
 hirio ha da viken.

o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o

Tantum ergo.

Tantum ergo sacramentum veneremur cernui
 et antiquum documentum novo cedat ritui,
 praestet fides supplementum
 sensuum defectui.

Genitori, Genitoque laus et jubilatio:
 salus, honor, virtus quoque, sit et benedictio;
 procedenti ab utroque compar sit laudatio.
 Amen.

o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o

Chant final

Refrain. Da feiz hon tadou koz,
 ni potred Breiz-Izel,
 ni zalc'ho mat atao;
 'vit feiz hon tadou koz
 hag endro d'he baniel,
 ni holl en em stardo;
 feiz karet hon tadou, morse ni ho nac'ho,
 kentoc'h ni a varvo (3 fois).

D'ar c'hrouadur bihan,
 e kichenig e gavel,
 e lakit eur vamm vat,
 en deiz evel en noz;
 er boan hag en anken,
 hi a dol buan eur zell
 war groaz santel Jezuz,
 he sonj er baradoz.

o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o

o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o-o

